

II. Aozadur ha diorren ha takad gall

Tem 1: an takadoù é produiñ

Barregerzhioù:

Lec'hiiñ ar skouerioù studiet er c'hlas

Deskriviñ ha displegiñ:

- gweledvaoù labour-douar, industriel ha servijoù pe touristel
- displegiñ abegoù lec'hiadur un obererezh a skeul lec'hel

Anavezout oberourien hag obererezhioù ekonomikel

Displegiñ mont en-dro un takad é produiñ é implij skeulioù disheñvel (lec'hel, broadel, europat, etrevroadel)

Gouiziegezhioù pennañ

An 3 takad é produiñ àr an tiriad gall

Takadoù labour-douar

- labour-douar arbennik(mekanizadur, produusted)
- Liesgounerezh

Takadoù industriel

- takadoù industriel é kemm
- Zonenoù industriel-porzhel (ZIP)
- teknopol-teknopolennoù

Takadoù ar servijoù

- takadoù kenwerzherel
- kenwerzh arbennik
- karterioù an aferioù
- takadoù touristel, takadoù dudi

Penaos e ya àr-raok an takadoù é produiñ?

An takad labour-douar

- nebeutoc'h a stalioù labour-douar(770 000), gounidgezhioù arbennik, mekanizadur, implij produioù industriel ha kimiek niverus
- Kresk an akorad
- Saotradur é krappaat, efedoù àr kalite ar boued hag ar yec'hed
- Diorren ur labour-douar biolojik pe ur labour-douar poellek evit doujiñ doc'h an diorren padus

An takadoù industriel

- Takadoù industriel e Su, Kornôg ha trogêrioù
- Takadoù nevez èl teknopoloù
- Striv evit digresk ar saotradurioù

Takadoù ar servijoù

- Diorren ar zoennoù kenwerzhel ha karterioù an aferioù
- Kreizoù-kêr talvoudekaet
- Kempenn ha diorren ar c'hêrioù kouronkiñ hag ar c'hêrioù skiñ
- Takadoù touristel ha takadoù dudi

Ar c'heriaoueg

Takad é produiñ: takad terket ha lakaet da dalvoud evit un obererezh ekonomikel

Evit an takadoù labour-douar:

Gounidigezh askoridik: doare gounid a glask kaout askoradoù uhel

Gounidigezh ezdouar: gwrizioù ar blantenn a zo gounezet e-barzh podoù enne nutrimantoù ret evit lakaat he c'hreskiñ.

Mekanizadur: implij mekanikoù evit kemer plas ar mab-den.

OGM: organeg genoù kemmet, plantenn krouet er labourvaoù evit kaour askoradoù uheloc'h.

Liesgounerezh: produadur labour-douar a bep seurt.

Produusted labour-douar: keidenn ar produadur dre labourer-douar.

Industri gounezvouederezh pe agroboued: gennad a dro produioù ar labour-douar e madoù beveziñ, e produioù peuraozet.

Evit an takad industriel

Uhel teknologiezh: industri eus ar vegenn e-barzh damanioù an titouriñ hag ar c'hehentiñ (TIC) , an aerspas, bioteknologiezh...

Industri eus ar vegenn: industri a implij teknikoù modern-tre evit krouiñ produioù nevez a uhel-dalvoudgezh (urzhiataer, kirri-nij..)

Teknopol: zonenn obererezhioù a stroll embregerezhioù troet àr an indurioù eus ar vegenn, skolioù-meur, kreizennoù imbourc'hiñ (enklask-diorren)

teknopolenn: ar gêr ar zegemer un teknopol

Zonenn instriyel-porzhel: ur lec'h a stroll ur porzh , uzinoù, termenvaoù ha kreizennoù purerezh hidrokarburioù(gaz,eoul-maen): Ar Havr da skouer

Dilec'hiadur: serriñ ul lec'h produiñ evit digoriñ unan arall en estrenvroa-benn enporzhiñ en-dro ar produadur en doare marc'hadmatoc'h.

Fraostoù industriel: takad dliezet e-lec'h e chom uzinoù kozh.

Evit takad ar servijoù

An trede gennad: rann ar servijoù, kenwerzh, dezougenoù, kelenn, melestradurezh, tier-bank...

Touristelezh kouronkiñ: touristelezh àr vord ar mor

Touristelezh puilh: un touristelezh a sach un niver a dud uhel e-barzh ar memes lec'hioù

Touristelezh glas: touristelezh troet àr-zu dizoloiñ an natur hag ar maezioù.

Ar gentel

1. An takadoù industriel

Heuliet o deus an takadoù industriel emdro an industriezh

- **En XIX vet kantved** emañ ganet an c'hentañ indurioù e-tal ar meingleuzioù(minoù) galou hag houarn(Nozh, reter). Dont a ra ar c'hêrioù bras kreizennoù industriel a sach an dorn-labour.
- Enporzhiadurioù an eoul-maen goude an Eil Brezel-bed dre ar mor a gemm an aodoù: ar Stad a grou ar **zonennnoù industriel-porzhel:** ar Havr e norzh Pariz, Dunkerque e biz , Naoned e kornôg ha Fos-sur-Mer e su. An takadoù industriel-mañ o deus kemmet ar gweledvaoù é kas riskloù, saotradur ha kreizennoù divent.
- **Hiziv-an-deiz** e kas àr-raok an industri gall an uhelteknologiezh evit taliñ doc'h an hollvedeladur ha sevel kevredigezh an XXIVet kantved.An teknopolennoù a stroll insurioù eus ar vegenn, skolioù-meur, labourvaoù, ha kreizennoù imbourc'hiñ(enklask). Emañ lec'hiet an takadoù-mañ tro-dro d'ar c'hêrioù bras(Pariz, Tolosa), e-barzh rannvroioù plijus an endro hag an hin(Tolosa, Roazhon, Nice) hag ivez e-tal takadoù industriel en enkadenn e biz ar vro evit roiñ un obererezh nevez(Metz, Bethune) e-tal ar Vegalopolenn Europat).

Chom a ra Frañs ar **7vet galloud industriel er bed hag ar 4vet renk en UE** met lodenn an industri a ya àr gil (16% ag ar PDG e 2013 enep 22% e 2000); En em dreurfurmiñ a ra an industri gall evit chom emwerzh(dilec'hiadur, cheñch oberiantiz...) . **Birvidik eo strolloù gall** èl en apotikerezh, aerspas, kirri-tan, industri gounezvouederezh, energiezh... enframmet mat er bedeladur hag an indsutri pounner hag ar gwiadiñ a ya da get tamm-ha-tamm.

2. An takadoù labour-douar

-**1añ galloud labour-douar** eo Frañs en UE. Diazezet eo he labour-douar àr an industriezh gounezvouederezh(IAA) kreñv, kentañ gennad industriezh gall.

-An takadoù labour-douar a implij an hanter ag an tiriad gall (meteier a bep seurt). Stummiñ a ra ar labour-douar ar gweledvaoù. Diazezet eo ar labour-douar àr **sistemoù produiñ muioc'h-mui arbennik** hervez ar metoù: sevel-loened askoridik e Breizh, Vande, Normandi, ar gounidegerezh ederezh e Beauce, Picardi, Champagne, ar legumajerezh ha liorzhouriezh e traoñiennoù ar Ro, Liger, Garon hag ar gwiniieg e Bourdel, Liger, Champagne, Bourgogne... hag ivez emañ diazezet àr produioù get merkoù, label (produet e Breizh, AB Bio....)

-Emañ é vihanaat niver a labourerien-douar : **nemet 3% ag ar** boblañs oberiant . Ar liesgounerezh a ya àr vihanaat (meur a c'hounidigezh evit ar memes stal labour-douar).

-Arbennik e ta da vout ar labour-douar a-benn uhelaat ar produadur, digresk koust ar produadur ha kenwerzhiñ ar produadurioù labour-douar..

Evit-se eo bet **kemmet an takadoù labour-douar:**

- implij temzoù kimiek é kreskiñ.
- Mekanizadur
- Test an OGM er labourvaoù
- Stalioù labour-douar brasoc'h.

An efedoù àr ar mab-den hag an endro:

- Saotradurioù a bep seurt (gweleadoù freatek saotreet get temzoù kimiek)
- An douriñ a laka da zigresk an danvezioù dour
- Ar magiñ chatal n'eo ket a-feson evit ar mab-den hag ar loened.

-Labourerien-douar a grog da lakaat e-pleustr ur **labour-douar poellek**, é toujiñ doc'h an diorren padus:

- Kalite ar produ lakaet da dalvoud e-lec'h ar c'hementad
- Produioù kimiek bevennet pe difennet (labour –douar bio)
- Heuliñ ar produioù da bep prantad eus ar produerezh
- Strolliñ a ra ar labour-douar bio 3% ag an tiriad gall

Lakaet e vez da dalvoud **labeloù** gall hag europat (ab Bio; Produ e Breizh...).

3.Takad ar servijoù

A. An takadoù touristel

Degemer a ra Frañs 80 milion a douristed bep blezad hag emañ **ar c'hentañ lec'h touristel bedel**. Ar lodenn vras ag an douristed a za a Europa.

Displeget e vez-se get a bep **seurt abegoù:**

- lec'h geografel : kroazhent en Europa
- Hin a-du dreist holl er su
- A bep seurt meteier naturel
- A bep seurt frammoù touristel(touristelezh-kêr ha sevenadurel, touristelezh kouronkiñ, touristelezh gals, toursitezh gouañv er c'hreizennoù ski).
- Ur glad gastronomiezh pinvidik
- Parkeier dudi(Eurodisney, Asterix, Vulcania, Futuroscope..)
- Surentez, aveadurioù

Kentañ lec'h touristel ar vro eo Pariz get un touristelezh sevenadurel ha kêrel (Miridi ar Louvre, Iliz-veur Notre-Dame, tour Eilffel,...)

B. Ar servijoù arall

75% ag ar boblañs oberiant a labour en trede gennad hag e krou 80% a pinvidigezh ar vro.

An trede gennad a stroll a bep seurt oberiantiz anvet servijoù:

- servijoù marc'had èl ar c'henwerzh, dezougenoù..


-servij en diavaez marc'had meret get ar Stad èl an Deskadurezh, melestradurezh, ar yec'hed, ar surentez..





Takadoù ar servijoù a vez stag doc'h ar c'hêrioù peogwir e vez dalc'h doc'h niver a annezidi. Seul vui e vez bras ar gêr seul vui e vez niverus ar servijoù.

Er metropolennoù bras, get ar bedeladur, e vez strollet an oberiantizoù servijoù **e-barzh karterioù an aferioù** é kemm a-vuzul: Defense e Pariz pe Euralille e Lille; akipamantet mat int get dezougenoù(ti-gar TGV, aerborzh, gourhentoù, metroioù...) a-benn sachiñ sezoù sokial an embregerezhioù bras(bankoù, kompagnunezh asurañsoù, firmoù etrevroadel...)


Ar bedeladur en deus kreñvaet galloud divizout ar metropolennoù hag ar servijoù a zo e-kreiz ar meurgêriekadur.




Takadoù al labour-douar




-  Gounidigezhioù ederezh, betarabez, kolza, melchon
-  Sevel-loened askoridik(moc'h, yer)
-  Liesgounezerezh ha sevel loened
-  Gounidigezhioù arbennik(legumajerezh, liorouriezh, gwiniieg)



Takadoù industriel



-  An div greizenn industriel
-  Industrierezh nevez birvidik (uhelteknologiezh)
-  Rannvroioù industriel kozh é kemm

Takadoù ar servijoù



-  Kreizennoù an trede gennad
-  Takadoù touristel
- 